


# VA C'HATEKIZ BIHAN



Evit mont d'ar Baradoz, me a dle

heulia Jezuz,

selaou Jezuz,

kaout ennoun buhez Jezuz.

TOLRA —:— embanner —:— PARIS

Ano : \_\_\_\_\_  
 Lesano : \_\_\_\_\_  
 Ganef : \_\_\_\_\_  
 e : \_\_\_\_\_  
 Badezet : \_\_\_\_\_  
 e : \_\_\_\_\_



BENNIGA A RIN  
 O HOLL OBEROU

Nihil obstat :  
*Kemper, 20 C'houevrer 1943*  
 H. PERENNES  
 Doktor war an Teoloji

IMPRIMATUR :  
*Kemper, 5 Mae 1943*  
 P. JONCOUR  
 Vikel-vras.

Copyright by Tolra 1943  
*Pep gwir miret striz.*

# VA C'HATEKIZ BIHAN



Evit mont d'ar Baradoz, me a dle

heulia Jezuz,

selaou Jezuz,

kaout ennoun buhez Jezuz.

TOLRA —:— embanner —:— PARIS  
 28, straed d'Assas, 76, straed Vaugirard

Aotrou Rener " Kenureuriez ar Brezoneg ",

Eürus bras oun o welout embann "VA C'HATEKIZ BIHAN" ha "VA C'HATEKIZ KRENN"; o lennet em eus gant dudi hag ober a ran va gourc'hemennou d'eoc'h ha da gement hini en deus labourer evit aoza e brezoneg katekiz nevez an eskopti. Plijout a ray d'an holl o veza m'eo skrivet e brezoneg sklaer, aes da intent, moulet brao ha skeudennet kaer.

"VA C'HATEKIZ BIHAN" a zo bet savet evit ar vugaligou; ennan e kavint kement a zo ret evit o fask bihan hag eun dra bennak ouspenn. "VA C'HATEKIZ KRENN" a zo bet savet evit ar vugale nao vloaz hag ouspenn.

Diwar vremen, ar c'hatekiz nevez a vo katekiz an eskopti. N'eus digarez ebet mui da zilezel ar c'hatekiz brezonek, ha fizians hon eus e vo lakaet muioc'h-mui war ar c'hatekiz brezoneg bugale ar parrezioù diwar ar maez. Mad ar feiz en hon eskopti eo her goulenn.

† ADOLF,  
Eskob Kemper ha Leon.

## PEDENNOU BRASA AR C'HRISTEN

### HON TAD HAG A ZO EN NENV

Hon Tad hag a zo en Neñv, — hoc'h ano bezet santelaet, — ho rouantelez deuet d'eomp, — ho polontez bezet graet war an douar evel en Neñv.

Roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek — pardonit d'eomp hon ofansou, evel ma pardonomp d'ar re o deus hon ofanset, — ha n'hon lezit ket da goueza en dentasion, — met hon diwallit diouz an droug.

Evel-se bezet graet.

### PATER NOSTER

Pater noster, qui es in caelis, — sanctificetur nomen tuum, — adveniat regnum tuum, — fiat voluntas tua, sicut in caelo et in terra.

Panem nostrum quotidianum da nobis hodie, — et dimitte nobis debita nostra, — sicut et nos dimittimus debitoribus nostris, — et ne nos inducas in tentationem, — sed libera nos a malo.

Amen.

### ME HO SALUD, MARI

Me ho salud, Mari leun a c'hras, — an Aotrou Doue a zo ganeoc'h, — benniget oc'h dreist an holl gwraez, — ha benniget eo ar frouez eus ho korf, Jezuz.

Santez Mari, Mamm da Zoue, — pedit evidomp, pec'herien, — bremañ ha da eur hor maro.

Evel-se bezet graet.

### AVE MARIA

Ave Maria, gratia plena, — Dominus tecum, — benedicta tu in mulieribus, — et benedictus fructus ventris tui, Jesus.

Sancta Maria, Mater Dei, — ora pro nobis peccatoribus, — nunc et in hora mortis nostræ.

Amen.

### ME A GRED E DOUE

Me a gred e Doue, an Tad Holl-C'halloudek, Krouer an Neñv hag an douar ;

— hag e Jezuz-Krist, e Vab unik, hon Aotrou, — a zo bet konsevet dre c'halloud ar Spered-Santel, — ganet gant ar Werc'hez Vari, — en deus gouzanvet dindan Pons-Pilat, — a zo bet krusiflet, — maro ha sebeliet ; — a zo diskenet d'an iferniou ; — d'an trede deiz savet a varo da veo ; — a zo pignet d'an Neñv, — hag azezet en tu dehou da Zoue an Tad Holl-C'halloudek, — ac'hano e teuy da varn ar re veo hag ar re varo.

— Me a gred er Spered-Santel,  
— en Iliz santel Katolik,  
— e komunione ar Sent,  
— e remision ar pec'hejou,  
— e rezureksion ar c'hig,  
— er vuhez peurbadus.  
Evel-se bezet graet.

### ME A GOFES OUZ DOUE

Me a gofes ouz Doue Holl-C'halloudek, — ouz ar Werc'hez gloriüs Vari, — ouz an Aotrou Sant Mikael arc'hael, — ouz an Aotrou Sant Yann Vadezour, — ouz an ebestel Sant Per ha Sant Paol, — hag ouz an holl Sent, — (hag ouzoc'h-c'houi, va zad), — abalamour m'am eus pec'het bras, — dre sonj, dre gomz ha dre ober :

Dre va faot, dre va faot, dre va brasa faot.

Rak-se e pedan ar Werc'hez gloriüs Vari, — an Aotrou Sant Mikael arc'hael, — an Aotrou Sant Yann Vadezour, — an ebestel Sant Per ha Sant Paol, — hag an holl Sent, — (ha c'houi, va zad) — da bedi Doue evidoun.  
Evel-se bezet graet.

### GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eun Doue hepken a adori,  
Ha dreist pep tra holl a gari.
2. Na dou ket ano Mestr ar bed,  
Ma n'ec'h eus abeg mat ebet.
3. Ar suliou santel a viri,  
D'enori Doue, d'e bedi.
4. Da dad, da vamm a enori  
Evit pell amzer ma vevi.
5. Ha mir na lazi den ebet  
Nag a galon nag a efed.
6. D'ar pec'hed vil n'en em ro ket  
Dindan boan da veza daonet.
7. Laerez na miret madou den,  
Gant gouiziegez ne ri biken.
8. Na gevier na fals-testeni,  
Mir birviken na lavari.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi  
Nag e sonj vil n'en em bliji.
10. Madou re-all na c'hoanta ket,  
Evit o c'haout hep gwir ebet.

### GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

1. Ouspenn ar sul, a-hed ar bloaz  
Pevar gouel-berz a viri c'hoaz.
2. Klevout a ri mat penn-da-benn  
Sul ha gouel-berz an oferenn.
3. Eur wech ar bloaz da vihana,  
E kofesai hep nac'h netra.
4. Ha da Salver a resevi  
Da Bask, devota ma c'helli.
5. Yun a ri añ daouzek deziou,  
Ar C'houraiz hag ar vijilou.
6. Da zeiz vijil, na da wener,  
Ne zebri kig e nep amzer.

### AN AKTOU

**Akt a feiz.** — Va Doue, me a gred start kement tra hoc'h eus diskleriet, — hag a ordren d'in an Iliz kredi, — abalamour ma'z oc'h ar wirionez, — ha n'hellit na fazia nag hon lakaat da fazia.

**Akt a esperans.** — Va Doue, me a esper digant ho madelez — ha dre veritou Jezuz-Krist, va Salver, — ho krasou er bed-mañ hag ar Baradoz er bed all, — abalamour m'hoc'h eus lavaret o rofec'h d'in, — ha ma talc'hit atao d'ho ker.

**Akt a garantez.** — Va Doue, me ho kar a greiz va c'halon, — ha dreist kement tra a zo, — abalamour ma'z oc'h peurvat — ha din meurbet da veza karet, — ha me a gar ivez va nesa evel-doun va-unan abalamour d'eoc'h.

**Akt a gontrision.** — Va Doue, keuz bras am eus d'ho peza ofanset, — abalamour ma'z oc'h peurvat, — ha din meurbet da veza karet, — ha ma tisplij d'eoc'h ar pec'hed. — Ho pedi a ran d'am fardoni dre veritou Jezuz-Krist, — ha me a lavar d'eoc'h a greiz va c'halon — n'hoc'h ofansin mui gant sikour ho kras hag e rin pinijenn.

### AR BENEDICITE

#### A-raok ar pred

1

Jezuz, ho pennoz d'eomp  
Ha d'ar pred a gavomp  
War an daol prest evidomp;  
Roit bara bepred  
D'ar re n'o dije ket;  
Evel-se bezet graet.

#### Goude ar pred

2

Trugarez d'eoc'h bremañ,  
Doue, Mestr war bep tra,  
Magadurez ha yec'hed.  
Ho pugale laouen  
Ho karo da-viken.  
Evel-se bezet graet.


#### A-raok ar c'hatekiz

Jezuz, va Salver benniget,  
Grit ma tigor va spered  
Ha ma teskin a wir galon  
Ho lezenn santel ha gwirion.

#### Goude ar c'hatekiz

M'ho trugareka, va Salver,  
Eus ho madelez em c'heñver;  
Desket em eus en ho lezenn  
Feiz ha deveriou ar c'hristen.

### AR RELIJION GRISTEN



Ar c'hatekiz a zesko d'in hent ar Baradoz.

#### 1. Ha c'houi a zo kristen ?

Ya, dre c'hras Doue.

#### 2. Petra eo eur c'hristen mat ?

Eur c'hristen mat a zo eun den badezet, a gred hag a heuilh ar religion gristen.

#### 3. Petra eo ar relijion gristen ?

Ar relijion gristen eo an hini a zo bet desket d'an dud gant Jezuz-Krist e-unan, p'edo o veva war an douar hag a vez desket d'eomp bremañ eus e berz gant an Iliz santel.

#### 4. Petra a zo er relijion gristen ?

Ar relijion a zo enni :

- 1<sup>a</sup> (da genta) : ar gwirioneziou da gredi.
- 2<sup>a</sup> (d'an eil) : ar goure'hemennou da heulia.
- 3<sup>e</sup> (d'an trede) : ar sakramantou da reseo.

**Da ober : Me a zesko mat va c'hatekiz.**



Doue eo krouer ar bed holl. Eus a netra en deus graet kement tra a zo. Ni a dle e anaout, e garout hag e servija.

✠ 5. *Lavarit ar «Gredo» e brezoneg.*

**Me a gred e Doue...** (paj. 4).

✠ 6. *Petra eo Doue ?*

Doue a zo eur spered pur, peurvat ha peurbadus; heñ eo krouer ha mestr ar bed.

✠ 7. *E-pelec'h emañ Doue ?*

Doue a zo en Neñv, war an douar hag e pep lec'h.

✠ 8. *Ha Doue a wel pep tra ?*

Ya, Doue a wel asamblez ar pezh a zo bet, a zo hag a vezo, ha lenn a ra er c'halonou ar sonjou ar muia kuzet.

**Da ober :** Doue a sell ouzin atao. Me a dec'ho bepred diouz ar pec'hed.

✠ Ar groazig-se a verk ar pezh a dle gouzout, d'an nebeuta, ar vugale, evit ober o fask bilan.



Deiz badeziant Jezuz er stêr Jourden. Doue a rizolo mister an Dreinded : an Tad a goz, ar Mab a zo badezet hag ar Spered-Santel a ziskenn dindan turm eur goulm.

✠ 9. *Pehini eo merk ar c'hristen ?*

**Sin ar Groaz eo.**

✠ 10. *Penaos e vez graet sin ar Groaz ?*

Sin ar Groaz a vez graet o kas an dorn-dehou d'an tal, ac'hano d'ar stomog, goude-se d'ar skouz kleiz, ac'hano d'an hini zehou, en eur lavarout :

**En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel. Evel-se bezet graet.**

✠ 11. *Petra eo mister an Dreinded ?*

**Eun Doue hepken e tri ferson : An Tad, ar Mab, hag ar Spered-Santel.**

**Da ober :** Me a raio mat sin ar Groaz.



Sant Mikael ha Lusiter



An Ael mat

Daou seurt aelez a zo : an aelez mat  
hag an aelez fall pe an diaoulou.

12. *Pere eo ar re wella eus an holl grouadurien ?*

**An Aelez hag an dud.**

13. *Petra eo an Aelez ?*

An Aelez a zo **sperejou pur, krouet gant Doue evit e veuli hag e servija.**

14. *Ha karget eo an Aelez mat da ziwall an dud ?*

**Ya, Doue en deus roet eun Ael mat da bep den evit e ziwall hag e hencha.**

**Da ober : Va Ael mat a zo atao em c'hichen. Me ne bec'hin ket.**



An diaoul, dindan furm eun naer vras, a laka hon tud kenta da  
bec'hi : debri a reont eus ar frouez difennet outo.

✠ 15. *Evit petra en deus Doue krouet an den ?*

Doue en deus krouet an den evit e **anaout, e garout, e servija ha gounit evel-se ar Baradoz.**

16. *Perc eo an daou zen kenta krouet gant Doue ?*

**Adam hag Eva, anvet hon tad hag hor mamm genta.**

17. *Ha sentus int bet alao ouz Doue ?*

**Nann, disenti o deus graet o tebri eus ar frouez difennet outo, hag abalamour da-se e teuomp holl war an douar er stad a bec'hed.**

18. *Penaos e vez anvet ar pec'hed a zeu ganeomp war an douar ?*

**Ar pec'hed orijinel.**

**Da ober : Ma a lavaro nann atao d'an diaoul.**



Goude o fech'hed, Adam hag Eva a zo taollet er-maez eus Baraduz an Douar.

**19.** *Ha Doue a zilezas an duil goude ar pec'hed ortjinel ?*

**Nam, prometi a reas d'ezo eur Salver.**

**20.** *Piou eo ar Salver-se ?*

**Ar Salver-se eo Jezuz-Krist.**

**✠ 21.** *Piou eo Jezuz-Krist ?*

**Jezuz-Krist eo mab Doue en em c'hraet den evit hor savetei.**

**✠ 22.** *Penaos e vez anvet mister Mab Doue en em c'hraet den ?*

**Mister Mab Doue en em c'hraet den a vez anvet Mister an Emzennadur (Inkarnasion).**

**Da ober : Me a lavaro alies ha gant respet ano santel Jezuz.**



Ar bastored a zeu da adori Jezuz e kraouig Betleem.

**✠ 23.** *Pe da zeiz eo bet ganet Jezuz-Krist ?*

**Jezuz-Krist a zo bet ganet da zeiz Nedeleg en eur c'hraou e Betleem.**

**✠ 24.** *E-pelec'h e tremenas an tregont vloaz kenta eus e vuhez ?*

**O zremen a reas e Nazaret, o pedi, o labourat hag o senti.**

**✠ 25.** *Petra a reas e-pad an tri bloaz diweza eus e vuhez ?*

**E-pad an tri bloaz diweza eus e vuhez, Jezuz a brezegas an Aviel e Bro-Palestin en eur ober burzudou bras.**

**Da ober : Me a garo va zad ha va mamm, ha me a sentô outo.**





Dro-Palestin, e-lec'h m'eo bet ganet Jezuz, a zo pell diouz Breiz.



Henchet gant eur steredenn vuzudus, tri den fur ha gouiziek (a vez graet ar Rouaned anezo), a zired eus ar Sav-Heol da adori ar Mabig-Jezuz.  
Kinnig a reont d'ezañ pour, ezañs ha mirh.




Gant aon da veza lakaet d'ar maro gant ar roue Herodez, ar Mabig Jezuz a dec'h d'an Ejipt.



D'an oad a zaouzek vloaz, Jezuz a yeas da dempl Jeruzalem. Doktored al lezenn a chom souezet bras o welout skiant ha lurnez eur buzel ken yaouank.



Betek e dregont vloaz. Jezuz a ehom e Nazaret. Tremen a ra e amzer o pedi, o labourat, hag o senti.



D'an oad a dregont vloaz. Jezuz en em laka da brezeg an Avel. E-pad eured kana, e ra e vuzud kenta o trei an dour e gwin.



Maro Jezuz.

✠ 26. *Petra eo mister an Daspenadur (Redemption)?*  
Mister an Daspenadur eo **Mister Jezuz-Krist** maro war ar groaz evit daspena an holl dud.

✠ 27. *Pe da zeiz eo maro Jezuz-Krist?*  
Da zeiz Gwener ar Groaz, war ar Menez-Kalvar, e-kichen kêr Jeruzalem.

✠ 28. *Pe da zeiz eo pignet Jezuz-Krist d'an Neuv?*  
Da zeiz ar Yaou-Bask, daou-ugent devez goude e rezureksion.

Da ober : Me a dec'ho diouz ar pec'hed, en deus staget Jezuz-Krist ouz ar groaz.



Da sul ar Pantekost, ar Spered-santel a zi-keennas war an Ebestel, dindan furn teoudou tan.

**29.** Petra a lavaril dre ar c'homzou : « Me a gred er Spered-Santel » ?

Dre ar c'homzou-se, me a lavar ez eus eun trede personaj en Dreinded Sakr, anvet ar Spered-Santel, hag a zo Doue evel an Tad hag ar Mab.

✠ **30.** Petra eo an Iliz ?

An Iliz eo an holl gristenien gouarnet gant hon Tad santel ar Pab ha gant an eskibien a zo a-unan gant ar Pab.

**31.** Plou en deus savet an Iliz ?

Hor Salver Jezuz-Krist.

Da ober : Me a raio mat sin ar Groaz : en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel.



Da fin ar bed e vezo barnet an holl dud gant Jezuz-Krist : ar re vat a yelo d'ar Baradoz. Ar re fall a vezo stlapet en ifern.

✠ **32.** Petra a zeu an ene da veza goude ar maro ?

Dioustu goude ar maro, an ene a vez barnet gant Doue : setu ar pezh a anver ar varn genta.

✠ **33.** Piou a ya d'ar Baradoz ?

Ar re a varv er stad a c'hras hag o deus peurbacet o die da justiz Doue.

✠ **34.** Piou a ya d'an ifern ?

Ar re a varv er stad a bec'hed marvel.

Da ober : Me a vevo atao er stad a c'hras, evit mont d'ar Baradoz.



War ar Menez-Sinaï, Doue a ro da Voizez en dek gourc'hennenn.

35. E-pelec'h eo merket hon deveriou ?

Ar pep brasa eus hon deveriou a zo merket e **gourc'hennennou Doue hag e re an Iliz.**

36. Lavarit gourc'hennennou Doue.

**Eun Doue hepken a adori...** (paj. 3).

37. Lavarit gourc'hennennou an Iliz.

**Ouspenn ar sul, a-hed ar bloaz...** (paj. 4).

38. Petra a ranker ober evit santelaat ar sul ?


**Evit santelaat ar sul, e ranker :**

1<sup>a</sup> (da genta) : **Mont d'an oierenn.**

2<sup>a</sup> (d'an eil) : **Chom hep labourat.**

3<sup>e</sup> (d'an trede) : **Diwall diouz ar plijadurioù fall.**

**Da ober : Me a yelo d'an oferenn bep sul ha bep gouel-berz.**



Jezuz o prezeg an Aviel war ar Menez.

✠ 39. *Pere eo deveriou ar vugale e-keñver o zad hag o mamm ?*

**Ar vugale a dle karout o zad hag o mamm, o enori, senti outo, hag o sikour en o ezommou.**

40. *Petra a zo d'ober evit chom glan ?*

**Beza mat da bedi, diwall diouz kement tra a zoug d'ar pec'hed vil, mont alies da gomunia ha beza devot d'ar Were'hez Vari.**

41. *An hini en deus laeret eun dra bennak, petra a dle ober ?*

**Ret eo d'ezañ restaol ar pezh en deus laeret.**

**Da ober : Me a sento ouz va c'herent atao ha dioustu.**



Ar Samaritan madelezes a gav war e hent eur paour-kaez den gloazet hag a gemer truez outañ.

**42. Pere eo ar vertuziou teologal ?**

Ar vertuziou teologal eo ar Feiz, an Esperañs hag ar Garantez.

✠ **43. Grit eun akt a feiz.**

« Va Doue, me a gred start... » (p. 4).

✠ **44. Grit eun akt a esperañs.**

« Va Doue, me a esper... » (p. 5).

✠ **Grit eun akt a garantez.**

« Va Doue, me ho kar... » (p. 5).

**Da ober : Me a garo Doue dreist pep tra.**



Jezuz a zo staget ouz ar groaz abalamour d'hor pec'hejou.

✠ **45. Petra eo ar pec'hed ?**

Ar pec'hed a zo eun disentidigez ouz lezenn Doue.

**46. Pel seurt pec'hejou a zo ?**

Daou seurt pec'hejou a zo : ar pec'hed marvel hag ar pec'hed veniel.

**47. Penaoz e vez graet ar pec'hed marvel ?**

Ar pec'hed marvel a vez graet o tisenti ouz lezenn Doue en eur wall-dra gant anaoudegez ha bolontez leun.

**48. Pel pec'hed kapital a zo ? (1)**

Seiz pec'hed kapital a zo : al lore'hentez, ar bizoni, an hudurnez, an avi, al lontegez, ar vuanegez hag an diegi.

**Da ober : Bemdez diouz an noz, me a lavaro va akt a gontrision.**

(1) Ar c'hatekiz koz a lavare : an ourgouilh, an avaristed, al luksur, an avi, ar gourmandiz, ar vuanegez hag an diegi.



Saul gounezet d'ar feiz. Tizet gant gras Doue war hent Damas,  
Saul a lavar : « Aotrou, petra a fell d'oc'h e rafen ».

49. *Pet seurt grasou a zo ?*

Daou seurt grasou a zo : ar c'hras-santelaat hag ar c'hras-sikour.

50. *Petra a zeuomp da veza gant ar c'hras-santelaat ?*

Gant ar c'hras-santelaat e teuomp da veza templou d'ar Spered-Santel, bugale da Zoue hag eritourien eus ar Baradoz.

51. *E pe stad e vezomp neuze ?*

Er stad a c'hras.

52. *Penaos e koller ar stad a c'hras ?*

Dre ar pec'hed marvel.

Da ober : Me a dec'ho diouz ar pec'hed evel ma tec'hfen diouz eun naer.



Hor Salver  
a teski d'e ziskibien :  
« Hon Tad hag a  
zo en Neñv ».

Ar Arc'hael Gabriel  
a lavar d'ar  
Werc'hez : « Me ho  
salud, leun a c'hras ».

✠ 53. *Petra eo pedi ?*

Pedi a zo sevel hor spered hag hor c'halon war-du Doue evit e adori, e drugarekaat ha goulenn digantañ e c'hrasou hag ar pardon eus hor pec'hejou.

54. *Peur e tleomp-ni pedi ?*

Alies, ha dreist-holl mintin ha noz.


✠ 55. *Lavarit pedenn Hor Salver, pe « Hon Tad hag a zo en Neñv... »*

Hon Tad hag a zo en Neñv... (p. 2).

✠ 56. *Lavarit salud an Ael, pe « Me ho salud, Mari ».*

Me ho salud Mari, leun a c'hras... (p. 2).

Da ober : Me a lavaro bemdez va fedenn, mintin ha noz.



Dre ar sakramanchou e feu d'omp ar grason gounezet gant Jezuz-Krist war ar Groaz.

57. *Pel sakramant a zo ?*

Seiz sakramant a zo :  
ar Vadeziant, ar Goufirmasion, Sakramant an Aoter, ar Binijenn, an Nouenn, an Urz hag ar Briedelez.

58. *Petra eo ar Vadeziant ?*

Ar Vadeziant a zo eur sakramant a laka ennomp buhez Doue hag a nêta hon ene eus ar pec'hed orijinel.

59. *Petra a zeuomp da veza dre ar Vadeziant ?*

Dre ar Vadeziant e feuomp da veza kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz.

60. *Ha ret eo beza badezel evit mont d'ar Baradoz ?*

Ya, ar vugale n'int ket bet badezet, n'hellont ket mont d'ar Baradoz.

Da ober : Me a vezo atao eur c'hristen mat.



Ar goan zliveza : da abardaiz ar Yaou-Gamblid, Jezuz a grogas en eun tamm bara, her bennigas, her rannas gant e ebetel, en eur lavarout : « Kemerit ha debrit, an dra-mañ eo va c'hort ».

✠ 61. *Petra eo Sakramant an Aoter ?*

Sakramant an Aoter eo ar sakramant a zo eunnañ Hor Salver Jezuz-Krist, gwir Doue ha gwir den, dindan spesou ar bara hag ar gwin.

✠ 62. *Petra eo komunia ?*

Komunia a zo reseo Hor Salver Jezuz-Krist e Sakramant an Aoter dindan spesou ar bara.

63. *Peur e tle ar vugale komunia ?*

Da Bask, kerkent ha m'o deus skiant a-walc'h.

Da ober : Me a yelo alies d'an iliz, da adori Jezuz-Krist e Sakramant an Aoter.



Ret eo komunia da Bask ha da eur ar maro dindan honn a bec'hed.

✠ 64. Ha komunia a c'heller gant eur pec'hed marvel ?

Nann ; komunia gant eur pec'hed marvel a zo eur sakrilañ.

65. Petra a zo da ober, pa vez graet eur pec'hed marvel ?

Pa vez graet eur pec'hed marvel, eo ret mont da gofes a-raok komunia.

✠ 66. Ha komunia a c'heller goude beza debret pe evel ?

Nann ; ne c'heller komunia nemet war yun e vefer abaoe hanternoz.

Da ober : Me a yelo alies da gomunia.



Ar mab foran

✠ 67. Petra eo ar Binijenn ?

Ar Binijenn a zo eur sakramant savet gant Ilor Salver Jezuz-Krist evit pardoni ar pec'hejou a vez graet goude ar vadeziant.

68. Peur e resever sakramant ar Binijenn ?

Pa ro ar beleg an absolvenn.

✠ 69. Petra eo ar Gontrision ?

Ar Gontrision a zo eur c'heuz gwirion da veza ofanet Doue gant eur volontez start d'en em virout diouz ar pec'hed en amzer da zont.

✠ 70. Grit eun akt a Gontrision.

Va Doue, keuz bras am eus... (p. 5).

Da ober : Me ne chomin morse er stad a bec'hed marvel.





Er gador-gofes, avarout ar pec'hejou d'eur beleg a zo o lavarout da Jezuz e-unan.

✠ 71. *Petra eo kofes ?*

Kofes a zo diskleria ar pec'hejou d'eur beleg evit kaout ar pardon anezo.

72. *Ha ret eo kofes an holl bec'hejou ?*

Ya, ret eo da vihana kofes an holl bec'hejou marvel.

73. *An neb a guz eur pec'hed marvel, ha pardonet e vez d'ezañ e bec'hejou ?*

Nann, pec'hed ebet ne vez pardonet d'ezañ hag ober a ra eur sakrilaj.

✠ 74. *Lavarit : Me a gofes ouz Doue...*

Me a gofes ouz Doue... (P. 3).

Da ober : Me a lavaro atao d'ar beleg va holl bec'hejou.



Ar beleg, evit rei sakramant an Nouenn, a ra sin ar Groaz gant an oleo-sakr war skianchou an den klañv.

75. *Petra eo an Nouenn ?*

An Nouenn a zo eur sakramant hag a zo bet savet gant Jezuz-Krist evit ober vad da ene ha da gorf ar re glañv.

76. *Petra eo an Urz ?*

An Urz eo ar sakramant a ra ar veleien.


77. *Pehini eo karg ar veleien ?*

Karg ar veleien eo :  
Lavarout an oferenn,  
Rei ar sakramanchou,  
Ha prezeg lezenn Doue.

78. *Petra eo ar Briedelez ?*

Ar Briedelez a zo eur sakramant hag a santela dimezi ar gwaz hag ar vaouez.

Da ober : Me a saludo ar veleien.



Ar grason lavaret gant holl dud an ti asamblez.

**79.** *Penaos e lle ar c'hristen santelaat e zevéz ?*

**Oe'h ober pep tra evit plijout da Zoue.**

**80.** *Petra a dle ober ar c'hristen, pa sav diouz ar mintin ?*

**Mont a dle war e zaoulin da lavarout e bedennou.**

**81.** *Penaos e lle ar c'hristen santelaat e labour ?*

**O kinnig al labour-se da Zoue hag o c'houzañv hep en em glemm ar boan en deus gantañ.**

**82.** *Penaos e lle ar c'hristen echui e zevéz ?*

**Dre ar bedenn adarre hag eur sell war e goustiañs.**

**Da ober :** A-raok mont da gousket, me a c'houlenno pardon digant Doue eus pec'hejou an devez.

## PENAOŠ KOFES

**A-raok mont er gador-gofes :**

Grit sin ar Groaz hag ar bedennig-mañ :

« Salver Jezuz, deuet oun da c'houlenn pardon eus va fec'hejou.

**Va sikourit d'o c'hask ha d'o c'havout holl,  
d'o anzav holl,  
da gaout keuz d'ezo holl.**

**Gwerc'hez Vari, va sikourit da gofes mat ».**

**Goude :** **klaskit ho pec'hejou.**

Ma n'ouzoc'h ket penaos o c'hask pe o lavarout, lennit goustad roll ar pec'hejou a zo amañ war-lerc'h. C'houi a welo pere hoc'h eus graet hag a lezo ar re-all.

**It neuze er gador-gofes d'ho tro.**

**Daoulinit enni, pe chomit en ho sav, ma 'z oc'h re vihan.**

**Pa zigoro an nor vihan, troit war-du ar beleg, a zo en tu all, grit sin ar Groaz ha lavarit :**

**« Ho pennoz d'in, va zad, abalamour m'am eus pec'hed ».**

Me a gofes ouz Doue holl-c'halloudek... hag ouzoc'h, va zad, abalamour m'am eus pec'hed bras dre sonj, dre gomz ha dre ober.

N'oun ket bet o kofes abaoe...

Bet em boa an absolvenn.

Graet em eus va finijenn.

N'em eus disoñjet pec'hed ebet er wech diweza, (pe) : er wech diweza em eus disoñjet lavarout...

Setu ar pec'hejou am eus graet abaoe :

### 1) PEC'HEJOU ENEP DOUE :

N'em eus ket lavaret va **fedennou...** (pet gwech).

O lavaret fall em eus... (pet gwech).

Manket em eus en **oferenn da sul** dre va faot (pet gwech).

C'hoarzet, komzet, c'hoariet em eus en **iliz...**

Manket oun bet er **e'hatekiz...**

N'em eus ket desket va **e'hatekiz...**

**Komzou groz** am eus lavaret...

Mez am eus bet o tiskouez oun **kristen...**

**Debri kig** am eus graet d'an deveziou difennet.

### PEC'HEJOU ENEP AN NESA :

**Disenti** am eus graet ouz va c'herent, va beleien, va mistri.

**Divergont** oun bet outo.

**C'hoarzet** em eus d'ezo.

**Skouer-fall** am eus roet d'am c'hamaladed.

**Aliou fall** am eus roet d'ezo.

O lakaet em eus da **ober droug**.

**Skei** am eus graet ganto.

**Laeret** em eus madigou, frouez, arc'hant... (lavarout pegement).

**Disleal** oun bet em c'hoariou.

**Er skol** em eus sellet war gaierou ar re-all.

**Torret ha louzet** em eus traou ar re-all.

Lavaret em eus **gevier**.

**Diskuilhet** em eus faotou ar re-all.

Lavaret em eus, eus ar re-all, **droug** ha ne oa ket gwir.

### PEC'HEJOU EN ENEP AN-UNAN :

Lorc'hus oun bet (ourgouilhus).

Mouzet oun bet.

Piz oun bet.

Chomet oun bet da **sonjal e traou vil** (pet gwech).

Chomet oun bet da sellout ouz **traou vil** (pet gwech).

Komzet em eus eus **traou vil**.

Lennet em eus **levriou vil**.

Graet em eus **traou vil va-unan**.

Graet em eus **traou vil gant re-all**.

**Avi** am eus bet.

**Lontek** oun bet (gourmand).

**Droug** a zo bet ennoun.

**En em venji** am eus graet.

**Diegus** oun bet da sevel.

**Diegus** oun bet er skol.

Pa vez echu ganeoc'h diskleria ho pec'hejou, lavarit :

« **N'em eus sonj eus pec'hed ebet ken...**

**Dre va faot, dre va faot** »...

Neuze ar beleg a lavaro d'eoc'h eur gomz vat bennak da rei d'eoc'h sklerijenn ha kalon.

Selaouit ha taolit evez ouz ar **binijenn** a roio d'eoc'h.

Pa vezit gant hoc'h « **akt a gontrision** », sonjit petra a lavarit. Neuze e vez ar beleg, diouz e du, o rei d'eoc'h **an absolvenn** en ano an Aotrou Doue.

**Pa vezit deuet er-maez** eus ar gador-gofes, sellit ouz an tabernakl, ha, goustadik, gant 'ho kalon hag ho feiz, lavarit :

« **Va Jezuz, mil bennoz d'eoc'h.**

« **Ho trugarekaat a ran d'am beza pardonet.**

« **Hiviziken, me a vezo fur ha sentus ouzoc'h** ».

**A-raok kuitaat an iliz**, grit mat ho pinienn. Pa vezo echu ganeoc'h, grit eur pleg-daoulin dirak ar **Sakramant**, hag it d'ar gêr, en eur sonjal er **gomunion** a dleit ober en deiz war-lerch.

## KANTIKOU

### 1. — Eürus an hini (11) (1)

1

Eürus an hini a garo Doue,  
Eus e holl galon hag e holl ene.

2

An den a blijo da Zoue hon Tad  
A vo diwallet ha diwallet mat.

### 2. — Meulomp holl (12)

Diskan :

Meulomp holl da-viken,  
Jezuz, gwir Doue, gwir den } (2 wech)

1

Me ho meul, o va Jezuz,  
C'houi ho peus va c'hrouet,  
C'houi ho peus va frenet,  
C'houi am mag, o va Jezuz !

### 3. — Me 'zo kristen (16)

Diskan :

Me 'zo kristen, setu eno  
Va esperans, va c'hanaouenn ;  
N'eus ket er bed kaeroc'h ano :  
Me 'zo kristen ! Me 'zo kristen !

1

Me 'zo kristen ! Mab oun da Zoue,  
Ouz e lezenn 'fell d'in senti ;  
Dre nerz e c'hras ez ay va ene  
D'ar Baradoz : pebez dudi !

### 4. — Kristenien da-viken (18)

Diskan :

D'hor Mamm Santez Anna,	Ni 'zo gwir gristenien,
D'an Itron Varia,	Prenet gant gwad Jezuz,
D'hor Salver benniget,	Maget dre c'hourc'hemenn
Ni 'vo fidel bepred.	Gant e gorf prizius.

(1) Niverenn al levr kantikou.

### 5. — Da feiz hon tadou koz (20)

Diskan :

Da feiz hon tadou koz, ni paotred Breiz-Izel  
Ni 'zalc'ho mat atao ;  
'Vit feiz hon tadou koz, hag en-dro d'he banniel  
Ni holl en em stardo.  
Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho,  
Kentoc'h ni a varvo ! (3gw)

1

Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon tadou,  
Birvi a ra ennomp kalon ar gwir soudard.  
Eur Breizad hag a dro da-heul ar fals-kredennou,  
N'eo ket eur gwir Vreizad, n'eo nemet eun trubard.

### 6. — Ar Baradoz (34)

1

Jezuz, peger bras've  
Plijadur an ene,  
Pa vez e gras Doue,  
Hag en e garante. } (2 wech)

2

Berr 'kavan an amzer  
Hag ar poanion dister,  
O sonjal deiz ha noz  
E gloar ar Baradoz.

3

Pa sellan en Neñvou,  
Etrezek va gwir vro,  
Nijal di a garfen  
Evel eur goulmig wenn.

### 7. — Keuz d'ar pec'hed (41)

Diskan :

Gwerc'hez venniget  
Mamm druezuz  
Me am eus lazet,  
Dre veur a bec'hed  
Me am eus lazet  
Ho mab Jezuz.

1

Pignomp, va ene,  
War ar C'halvar ;  
Gwelomp eun Doue,  
Leun a garante,  
Gwelomp eun Doue  
En e c'hlac'har.

2

E dreid 'zo gwriet  
Gant an tachou,  
E gorf dispennet,  
E benn kurunet,  
E gorf dispennet  
Gant ar fouetou.

**8. — O Kalon Sakr (47)**

1

O Kalon Sakr, Kalon Jezuz,  
C'houi 'zo meurbet karantezuz ;  
Plijet selaou ar pedennou,  
A sav a-greiz hor c'halonou.

2

C'houi eo ar feuntenn virvidik  
A daol grasou ken pinvidik,  
A resevomp da bep mare  
Hag a zo tenzor hon ene.

**9. — Adoromp holl (53)**

1

Adoromp holl, e Sakramant an Aoter,  
Doue kuzet, Jezuz hor Mestr, hor Salver,  
Sperejou evurus, aelez ar Baradoz  
Gant karantez a dan, meulit-heñ deiz ha noz.

2

Enor ha gloar ha karantez da Zoue ;  
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive ;  
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien  
Aketus d'e veuli, hirio ha da-viken.

**10. — A-raok komunia (59)**

Mari, gwir vamm da Zoue, Mari, va mamm dener,  
Va sikourit da reseo ho Mab ha va Salver ;  
Me ne doun, siouaz ! netra, netra nemet pec'hed,  
Met ennoc'h em eus fiziañs, o va Mamm benniget.

**11. — O Sakramant burzudus (57)**

1

O Sakramant burzudus  
'Lec'h omp maget gant Jezuz,  
Ennañ emañ Hor Salver,  
Kredi a ran war e c'her.

Diskan :

Adoromp Doue  
E Sakramant e garante !

2

Adoromp hor Roue bras  
En Neñvou ha war ar Groaz ;  
Adoromp hor gwir Salver,  
E Sakramant an Aoter.

**12. — Ave Maria (72)**

1

Ni ho salud, o leun a c'hras,  
Ar santela 'zo bet biskoaz,  
Mari,  
Ar santela 'zo bet biskoaz.

2

Santez Mari, Mamm da Zoue,  
Klevit pedenn ho pugale,  
Mari,  
Klevit pedenn ho pugale.

**13. — Pegen kaer... (102)**

Diskan :

Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz,  
Pegen dous ha trugarezus,  
Peger mat ha madelezus.

1

Lavar d'in-me, den an Arvor,  
Ha ken kaer eo da vag war vor,  
Gant he goueliou gwenn-kann digor ?

2

Lavar d'in-me, den an Argoad,  
Ha ken kaer deliou glas ar c'hoad,  
Pa zeu eur bann-heol d'o sklêraat ?

**14. — Kalon dinamm Mari (107)**

Diskan :

Ave, ave, ave Maria ! (2 wech)

1

Kalon dinamm Mari,  
Leun a garantez,  
Ni'zeu d'ho saludi  
Gant an holl aelez.

**15. — Laudate Mariam (81)**

Diskan :

Laudate, laudate, laudate Mariam !

1

Breiziz a-vihanik,  
Betek ar maro,  
O c'halon birvidik  
Laouen a gano.

2

E palez kaer Jezuz  
Bodet disoursi,  
Eun deiz ni 'vo eürus  
En-dro da Vari.

**16. — Mabig Jezuz (112)**

Diskan :

Ni hoc'h ador, Mabig Jezuz,  
Mabig dous ha karantezus,  
Doue meurbet madelezes.

1

Mabig Jezuz, e-kreiz an noz,  
C'houi a zilez ar Baradoz,  
Evit dont en hon touez  
[fenez.

2

Mabig Jezuz, Doue-Bugel,  
Ra vezo klouar an avel  
En noz-man en-dro d'ho  
[kavell !

**17. — Sant Jozef (126)**

Diskan :

1

Sant Jozef, pried Mari,  
Tag Mager da Jezuz,  
Ni 'fell d'eomp hoc'h enori,  
Patron karantezus.

Mirer choazet gant Doue,  
D'e Vab ha d'ar Werc'hez,  
Bet hoc'h eus en ho puhez  
Anken ha levenez.

**18. — Itron Santez Anna (132)**


Diskan :

1

Itron Santez Anna,  
Ni ho ped holl gant joa,  
Mirit tud an Arvor,  
War zouar ha war vor.

Mamm santel a Vari  
Salud a greiz kalon !  
Enor ha meuleudi  
D'hor. Mamm ha d'hon

[Itron.



MEULET-RA

JEZUZ-KRIST

VEZO